

Plac'hig an Douar Nevez Petite fille de Terre Neuve (5)

Yvonne LE GOFF (Mme QUERE) – Plounerin – Miz Mae 1980 (Plounérin – Mai 1980)



«Plac'hig an Douar Nevez

Ladirey tralaladira

Plac'hig an Douar Nevez

O te a zo bravig aze ?»

«Bravig a-walc'h ec'h on amañ

Ma vije ganin an hini a garan.

An hini a garan a blij din

N'emañ ket gwall bell diwin¹.

Aze emañ en korn an dañs

O lenn e dammig chañs !»

«Poz da zorn e-war e benn

Ha sach ganit en dachenn.

Na koantañ paotr 'teus te choazet

Ma vez ganit-te laosket.»

«Ya ganin-me a chomo

Ha ganin-me e kousko !»

«Mar gra an nozvezh kentañ

An eil e vo, an diwezhañ !»

¹ diwin = ouzhin

«Petite fille de Terre Neuve

Ladirey tralaladira

Petite fille de Terre Neuve

Te sens-tu bien là ?»

«Je me trouverais assez bien ici

Si celui que j'aime était avec moi.

Celui que j'aime me plaît

Il n'est pas très loin de moi.

Il se trouve là au coin de la danse

A lire sa petite chance.»

«Met ta main sur sa tête,

Et tire le sur le terrain

Quel beau gars tu as choisi

Si on te le laisse !»

«Oui, il restera avec moi

Et il dormira avec moi !»

«S'il le fait la première nuit

Il le fera la deuxième et la dernière !»

Plac'hig an Douar Nevez Petite fille de Terre Neuve (6)

Yves LE GRAET (tad Alberig ar Graet) – Bertu Nesañ - Mantalod – 1980 – (le père d'Alberig Le Graet – Bertu Nesañ – Mantallot – 1980)

«Paotrig an Douar Nevez

Tirey tira ladirey tra la la

Paotrig an Douar Nevez

Hag-eñ emañ brav bout aze ?»

«O ya brav a-walc'h eo bout ame¹

Ma vije ma c'hoant en em c'hichen.»

«Ma emañ ho c'hoant e-barzh an dachenn

Pozit ho torn war he fenn.»

¹ bout ame = bezañ amañ

«Petit gars de Terre Neuve

Tirey tira ladirey tra la la

Petit gars de Terre Neuve

Est-ce bien d'être là ?»

«Oh oui, c'est assez bien d'être ici

Si l'objet de mon désir se trouvait près de moi !»

«Si l'objet de votre désir se trouve sur place

Posez votre main sur sa tête.»